

Guers Lesobre.

Entre Koat ar Skine a Lesobre
 E zo assinet eun arme ;
 Diwar ben eun alec gwen e
 na na wa da ini deus ane.

An otro Koat ar Skine a levere,
 D'an otro Lesobre eun de a woe :
 Bed a meus urs digant ar Roue,
 Da dont do lazan Lesobre.

— Mar teus te bet urs dam lazan
 Diskoel an ean din breman ?
 — Disteran linen zo em godele
 Na rofen quet deun azen da len.

— Mar gon me azen a dra sur
 Ne c'hon quet azen a natur
 Ma zad a leret a woa den fur.

ma na teus quet anveet ma zad
 me rai did annaveet e vap.

An otro Lesobre a lere
 De vom er gher pa arrie :
 Dibret dime ma hancane
 ma hefomb d'ar gombat fete
 ma fachic bian deuï ive.

— Bonjour did otro Lesobre,
 Te zo deud da unan dan arme ?
 — non quet deud ma unan dar arme
 me fachet bian zo ive
 ag a iel er gombat couls a me.

An otro Lesobre a levere
 De fachet bian an de ze
 Troc da gleve eus ma c'hini
 Biskoas da gleve ne manket din.

Kri viche ar c'halon na ne woelche
 En Koat ar Skrine nep a viche
 Gwelet ar ied glas o ruïan
 gant goat ar Soudardet o skuillan.

ag e bach bian er c'hoste al
 a lac'he mui pe kement al.

an otro Koat ar Skine a lere
 Dan otro Lesobre an de se :
 nan Doue otro Lesobre
 Te lam digan ni me ma bue.

.....

 me recommand ma bugale dar Roue.

Paget ar Roue a levere
 Dan otro Lesobre eun de a woe :
 Laret zo did otro Lesobre
 Dond da koseal gant ar Roue.

.....

 Tro Doue Paget ar Roue
 Me ia duze da gol ma bue.

.....

 Mar keret nam diskuiflet ked
 Me laro dec'h penos vo gred.

E bars en Paris pa arrifet
 Saludin ar Roue a refet
 Saludin ar Roue ag ar Rouanes
 O saludin o daou assembles.

— Bonchour dec'h Roue a Rouanes
 Me zo deut yaouanket do bales
 Ag ous eun den yaouank on eus trues.

En triwarc'h gombat e c'hon bed
 Triwarc'h mil den e meus lac'het
 Ne meus quet bed biskoas a doan
 evel o c'h(o)ari deus o morian.

Pa entrefet varnan bars ar sal
 en tolo e zillad dan Douar
 Lesobre teulet o re voar var.

Pa kommancet c'hoari ontan
 C'hoariet a groas varnean
 a teulet dour biniguet gantan.

neuse rai' eur lamp en er
 a driwoarc'h troatad a c'huelder
 a kement al a ledander
 Leket o cleve den digomer.

Neuse laro did ar Roue
 Ten ta gleve ganit Lesobre
 neuse e respondfet dean
 sir deud o unan den tenan.

Otrou Lesobre a leveure
 Bars en baris pa arrie
 Bonchour Roue a Rouanes
 Me o salud o daou assembles.

me zo deud yaouanket do bales
 ag ous eun den yaouank on eus trues.

En triwoarc'h gombat e c'hon bed
 a triwoarc'h mil den e meus lac'het
 na meus bed biskoas kement a doan
 vel o choari deus eur morian.

.....
 mes sire dime a sinfet
 mar en lac'han ne mo droug e bet
 ag en voar sin farsal outan
 ag en vont da sinan desan.

pa entreas varnan er sal
répétition
 sire deud o unan de tenan (1)

ma mallos ganit Lesobre
 Te teus lac'het nep am harie
 a mar kretes em larc'hfes ie.

Sir c'houi o c'heus dime sinet
 ma e larchfen ne me droug e bet
 ag nep o sin nen defet quet.

itron santes anna biniguet
 c'houi o c'heus gret miraclo em andret
 me savo dec'h eun ilis er c'hanton
 war ar rivier vrás en Lanhuan.

*sur le fol. 42, seulement le titre : Gwers Lesobre.
 écriture de Kerambrun.*

(1) Strophe ainsi écrite dans le ms.